

Poésie bretonne

Un de nos amis, Breton bretonnant,
nous communique la pièce de vers sui-
vante, composée pour la circonstance :

D'AN AOTROU FELIX FAUR

maro pen-rener Bro-C'hall

En amzer ma oa kivijer,
A tougê skanv an davanjer,
O poanio, lawen ha zeder.
En dro d'ar ler.

En amzer ma oa marc'hadour,
Gwerzer leal, prener gedour,
A stourmaz vel eur brezelour
Nerzuz ha flour.

En amzer ma oa eur bagad
Brini Zao-Heol o klask argad.
A pakaz, o kinnig he wad,
Kroaz ar re vad.

En amzer ma oa pen-rener,
Meur a roue, meur impalaër
An euz stardet dorn ar poanier
Bet kivijer.

En amzer ma oa ar maro
O prienta kanw ha daëro,
Ne glevaz den diwar he dro
Eur gomz hoëro.

Goueet n'euz bevan ha mervel :
Etre he vez hag he gavel,
N'euz baleet, mestr pe mevel,
Atao henvel.

Bet eo bian, ha bet eo braz,
Nemet n'he lec'h n'eo bet biskoaz,
Hag en peb stad n'em diskoaz
Evel eur goaz.

Rak-se, græt gant-han he devar,
Ha leuniet mad eur vue ver,
N'evoa ket aoun hon fenn-rener
Rag ar Barner.

Ra vezo diskuiz he gousket,
Hag he hunvreou alaouret,
E kreiz ar vro gaër n'euz karet
Don douaret !

T. AR GARREK.